

AZ AR VRETONED

Kavet e ve war-n-i, en brezonek mad, kement tra a zell ouz hon Bro Breiz-Izel hag ouz he yez; hag ive, gwech an amzer, eur girianno bennag diwar-benn Breiz-Tramor.

Dale'hit bepred d'ho prezonek,
Yez an dud vad ha kalonek,

Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'het!
MILIN.

**GANT BREZONEK HO DEUD AR FEIZ
GAND AR GALLEK EZ AIO A VREIZ
Furuz ar Geiz.**

Na gontin ket d'ac'h petra gaer am euz gwelet er gêr vraz, nemet a laret a rafen d'ac'h evel ar potr bihan d'eur Saozon hag a oa o klask an tour Eiffel gant beg e lundou :

« An tour Eiffel, emean, a zo bet diskaret dec'h gant eur c'houad avel gorbél. »

An tour Eiffel 'zo bepred zoun en he zav : Hi eo evit gwir, *ansagn* Paris.

Mez n'euz forz pegent kaer eo ar ger vraz, na vo biken nemet *par Is*, ha mar dalc'h ar Vretoned da greski enni, zouden e teuo da vean eun *Is* neve.

DIR-NA-DOR.

GWERZ WAR STAD AR BREZONEK

loreet gant kevrediger Vreiz en Kemperle

War don : AEEZ DEUZ AR BARADOZ

Maes den ebet na gredfe penn oc'h penn ganemp-ni Deuz ar Brezonek zantel 'n em lakât d'enebi, Rak biskoaz n'eo bet Breiziz trec'het 'med a gus-kaer : Hogen, an tu d'hen flastra dre zindan a glasker.

Er skoliou eo bet kavet an noazusa doare Da skei gantan hep ehan taoliou didrugare : Skolerien, skolerezed, 'zo mistri a vrezel. Roet d'ê vit kevridi laza yez Breiz-Izel.

Hini Bro-C'hall 'deu warnomp, dre lammou dirollet, En eur c'holo bep kammed douar ganemp kollet ; Môr braz ar skridou gallek a zired euz Pariz, Pounneroc'h 'vit an hini zistrujuz ar Gêr Iz.

Breiziz zoken a glever war o yez ober fae, Gwerzet gante o fluen, hag o zeod, hag o fe ; Krenvât 'n hon touez 'ra bemde koagerez ar brini : War zao, dubeed Arvor, divrânomp hon c'houldri!

III

Dilamm hon yez 'ganimp-ni, ve dilamm hon ene : Petra lârfé d'ar Breizad ar môr, nag ar mene, Nag an avelioug garo, nag an noz spouronnek, Ma vije ken d'o finta ar geriou Brezouek ?

War don : AELEZ DEUZ AR BARADOZ

I

Eur vro dispar a lugern e-touez an holl vroïou,
Luskellet en hi c'hunvre gant mouez dôn ar moriou,
Paket hi fenn intanvez en eur lenn mougen c'hlaz,
Hag o sôn war eun delen hirvouduz vel eur c'hlaz.

Koulskoude, hi 'deuz mibien gant Doue dibabet,
Dre ma oant tud gallouduz, da ziwal garz ar bed,
Netra barrek d'o spounta na barrek d'o diskar,
Nag e teufe da gwea an nenv war an douar.

Koulskoude, en pep amzer, talc'h enni da zével,
Bleuniou aour leûn a dudi, bleuniou gwenn leûn a vèl,
Ha da bignat er c'hlazen, lemm evel noadeier,
Touriou kaer dantelezet lec'h ma kân ar c'hleier.

Koulskoude, 'n hi fardonïou, ve gwelet a vagad
Ar c'hoanta gwiskamanchou zo bed dirak lagad,
Ar merc'hedigou floura 'n euz c'hoazet d'ar vuhe,
An terrupla tud yaouank krouet dre zorn Doue.

Koulskoude, gand hi bombard pa c'houez hi biniou,
E nij ar c'horollerien war askel o zôniou,
Ha war veg hi meneou pa gân hi mesaerien,
E toull d'or ar Baradoz 'tispak selaourien.

Perak eta chom kânvuz tâl hon mamm Breiz-Izel,
Perak war an Tremenet e t'ol bepred hi zell,
Perak e talc'h da jâli : « Gwechall, gwechall, gwechall ! »
Netra 'met eman gwasket hi yez gant yez Bro-C'hall.

II

Eun devez, e tremeniz e-kichen eur c'houldri,
Bet enni 'pad tri c'hant vloa, dousder ha koantiri,
Bet enni dre vilierou koulmed gwenn o kluda,
Ha moueziou kun damantuz noz ha de o vruda.

Pebez souez pa glêviz, diabarz ar c'houldri,

Dilamm hon yez 'ganimp-ni, ve dilamm hon ene :
Petra lârfé d'ar Breizad ar môr, nag ar mene,
Nag an avelou garo, nag an noz spouronnek,
Ma vije ken d'o finta ar geriou Brezouek ?

Kollet e yez binniget, varvfe e holl dudi ;
Na wefe ken na c'hoarzin, na karout, na pedi :
E zent koz en ilizou a drofe kein d'ean,
Hag e anaon a ouelfe 'n o gwele divean.

Petra lârfé d'e galon bombard na biniou,
Koroll na c'hoariadek, kleier na pardonïou ?
Beteg e wiskamanchou n'o defe penn na troad :
Breizad en Breiz a chommfe evel eun divroad.

Mar hon deuz ta, kenvroiz, c'hoant mirout war hon zro
Kement zo bet a biskoaz nerz ha kaerder hon bro,
Diwallomp hon Brezonek, stourmomp 'vit hen difenn,
Vel ma stourme hon zadou, 'n eur c'hopal : « Torr-e-benn ! »

Meur a vech 'zo goulennet digant mistri Bro-C'hall
Rei d'emp kement a wiriou hag a roer lec'h all :
Vân ebet n'o deuz graet c'hoaz dimeuz hon fedennoù,
Maez, mar geo yen o c'halon, ni zo tomm hon fennou.

Pennou tomm, divrec'h kaled, dre hon c'hannaderien,
Ni renk trouzal ha c'hoari, dalc'hen horz gant ar yenn,
Ken a dreuzo diousskouarn ar C'hallaoued bouar ;
Ha gwaz d'ar c'hannaderien a gonzo re glouar !

Pep-hini 'nê zo galvet da zifenn gwir e vro ;
Neb na garo ket ober vo digaset en dro ;
Rak ni 'n euz gwiriou zantel divizet mad gwechall,
Pa brizaz hon Dukezik zével war drôn Bro-C'hall.

Neuze 'n evoa 'r Brezonek hepken urz da zistôn
Dindan ar goabren denval krouet vit ar Breton :
Ar Gall a renké goulén aotre 'benn kaozeal ;
Hag e fell d'ean hirie minella ar re-all ?

Netra ken na c'houlennomp 'med bean selaouet ;
Rak kiskoaz fae n'hon deuz graet war 'yez ar C'hallaoued ;
Evit hen komz e trec'homp zoken war o gourre,
Hon skridou ve en Gallek peurvuia bec'h d'o re.

Netra ken na c'houlennomp 'med e vo 'n hon skoliou
Deuz Brezonek en Gallek troet ar c'hennedou.
Gant ma vont lakaet o daou war eun hevelep troad,
Biken ar yez Brezonek na varvo 'n hon broad.

PLOUNEVEZ-MOËDEC

Kok Sant Per ha Pôtr ar Marc'h-houarn

Ar C'hok. — Digemer mad 'oa gret d'in ar wech diwean 'moa komzet, ha sethu perag e teu c'hoant d'in d'ober c'hoaz eun tammik kozeaden. Gwir eo 'zo kalz hag o devoa klasket anaveout ac'hanon; mez diez eo lakat an dorn war ma flu; laret 'ran d'ê na zôn na person, na kure, na belek, an oferen veure:

Potr ar Marc'h. — Joa 'm euz ouzid, kok Zant Per, ha kalz a blijadur a rafes d'in, o respont d'ar pezh 'c'h an da c'houlenn ganid. Me eo Potr ar marc'h-houarn. Trei, trei ma rojo buan, buan, buan ken a larfe an dud na finvont ket, ze blij d'in eleiz. Komz d'in eta, deuz Redadek vras Paris-Brest, zo tremenet e-tal da gichen epad miz Eost.

Ar C'hok. — Laret rin d'id am oa tôlet pled mad d'ar rederien. Gwelet ren anê pell 'rog oant arru 'n em c'hichen, o fenno astennet gant-ê 'vel Mari Goug-hir, o diouhar o labourad gwasoc'h 'vit re ar guyaderien, e zavent hag e tiskennet ar meneio buanoc'h vit na heller hen laret. Poan vras a gemere an dud keaz-ze, ha mad eo d'ê mar oa braz ar beamant, rak kalz dioute 'zo chomet hanter-vrevet, zur mad. Daoust d'an dud da 'n em skwizan er labourze, ar re yaouank ra mad koulskoude dispign o arc'hant da brena eur marc'h-houarn, elec'h dispign anean en evaj. Welloc'h eo bale war an hencho 'vit n' eo azei en hostalirio; bravoc'h eo ar potr yaouank o redek, vit n' eo war e ben an doufle. Me glev da, zul d'abarde pezh a dremen er bourk: leo-douet, komzo hudur, bep sort siousas, ha ze dirag bihan ha brâz. Te, ma mignon, bale war da varc'h; buhan te vezo en ti da vestrez, ha buhan, da noz, kichen da vam. Mar kavez, koueet war an hent, ar paour keaz mevier, diwall da vonet warnan, kerz kentoc'h da di e vreg, lavar d'ar vugale 'zo o krenan, o c'hortoz an noz tenval, donet da gerc'hat o zad 'zo du-hont, dour ha fank evel eur loen 'barz an doufle; ha te, kemer mez deuz kement-ze.

(*Da heuilh*).

Nij ha kan al lapoused

Ar pezh-labour koant-man a deu d'imp diwar an avel deuz koste Kerne, kan dudius eun evn o kanan an evned.



Me a blij d'in gwelet al laouenanik rouz,
En eul liorz vihan, en korn eun tiik plouz,
Pa ra lammedigou,

Me a blij d'in gwelet eur vagad brini du,
Douget war ar goabren, o nijal a bep tu,
Douget dreist bek ar c'hoat,
Er stourm skiltr o koagat,
Pa c'houez diroll
An avel foll,

Pa groz ar c'hoajou don vel eur mor konaret,
Pa strak ar gwe derv braz, diskloset ha draillet.

Me a blij d'in klevet, klevet mouez ar gaouen,
En eur c'harzad gwe derv, en bek eur goz kleuzen,
En kreiz an noz du-dall,
Klemvanuz o iouc'hal,
O iouc'hal iud,
Diwar he c'hlud,

Ha klevet he askel moug, o torno an êr
Euz eur gleuzen d'eben, o nijal a laër kaër.

Me a blij d'in gwelet, me a blij d'in klevet,
Nij-tarnij, mesk-divesk, an eüned marellet,
Plun kaër, kan dudiu
Te Deum laudamus,
Richan ha kan,
Kreiz an de splan,

Kant mouez flour o sevel gant an trôn deuz an de
O kano d'o C'hrouer muzik ar garante.

An EÜN.

(E. a. Glomel)

LANNUON

Retred ar zoudarded yaouank. -- Eur retred a zigoro evel bep bla, en Lannuon, *dimeurz d'abarde 22 a viz here*, evit ar zoudarded yaouank.

Ra ielont mui-ouz-mui di da 'n em grenvad kent mont a bell-bro.

MARIVONIK ABRANT

EUR PEZ-C'HOARI NEVE GANT DIR-NA-DOR

HIL ARVEST

DIVIZ I.

Janed he hunan.

Allaz, pennou kaled everien, pennou fall!
Et ê war eün d'ar bourk, kaer am euz bet krozal;
Dallet ê gant ar Men ha gant an hostizien;
Na ra ken van ebed 'vit ober pinijen
D'e dud, dismantr e dra. En e galon breman
Ar Gwin-Ardant, ar Men a dremen da gentan.

meier, diwall da vonet warnan, kerz kentoc'h da di e vreg, lavar d'ar vugale 'zo o krenan, o c'hortoz an noz tenval, donet da gerc'hat o zad 'zo du-hont, dour ha fank evel eur loen 'barz an doufle ; ha te, kemer mez deuz kement-ze.

(*Da heuilh*).

Nij ha kan al lapoused

Ar pezh-labour koant-man a deu d'imp diwar an avel deuz koste Kerne, kan dudius eun evn o kanan an evned.



Me a blij d'in gwelet al laouenanik rouz,
En eul liorz vihan, en korn eun tiik plouz,
Pa ra lammedigou,
En-mesk ar vodennou,
Zard ha koantik
Ha birvidik,
O tarnijal skanvik a vodik da vodik,
Nerz e galon, stank-stank, o kano e vuzik.

Me a blij d'in gwelet, en kreiz al lanneier,
O sevel ust d'an douar an eunik alc'houeder,
Pa zispak euz an ant,
En eur gano ken drant,
Hag o sevel
Uhel, uhel,
Hag hen klevet bepred, kuzet 'barz ar voren,
O kano d'e Grouer, zeder, e ganaouen.

Me a blij d'in gwelet, kludet en bek ar wên,
Gwelet ar voualc'hik du, kanfanten bek-melen,
Mistrik, kempen ha brav,
War vek he bod, 'n he zav,
Luskellet douz
Hec'h askel kloz :

He c'hlevet o c'hwitellat he zon gê ha sklinton,
Mesket flour ha douget gant ezen ar mintin.

Me a blij d'in gwelet ar sparfel logotaër
O sevel ust d'ar mene hag o frego an êr
Hag o vragal uhel
Bransellet en avel,
Reud e askel
Ha lemm e zell,

Hag o plavo didrouz, o plavo war e benn
Garv ha têt, en eun tol, bete deun an draouien.

barde 22 a viz here, evit ar zoudarded yaouank.
Ra ielont mui-ouz-mui di da 'n em grenvad kent mont a bell-bro.

MARIVONIK ABRANT

EUR PEZ-C'HOARI NEVE GANT DIR-NA-DOR

EIL ARVEST

DIVIZ I.

Janed he hunan.

Allaz, pennou kaled everien, pennou fall !
Et ê war eün d'ar bourk, kaer am euz bet krozal ;
Dallet ê gant ar Men ha gant an hostizien ;
Na ra ken van ebed 'vit ober pinijen
D'e dud, dismantr e dra. En e galon breman
Ar Gwin-Ardant, ar Men a dremen da gentan.
Hag e verc'h, eun tenzor 'n e di, hag e zaou vab,
Hag e vreg 'n euz lazet, deuz ar re-ze 'ra goap.
Pegement an evach a zizenor eun den !
Eun tad zilez e dud, seurt na ra ket eul loen !
Eun tad a sko e verc'h, e wad, a ratoz kaer.....
Doue ! petra rei c'hoaz pan arruo e-berr?...

DIVIZ II.

Marwonik, oc'h antren.

N'ho pet ket a drubuilh, Janed, evidon-me,
C'houi 'zo kustum a drouz, ha me a zo ive ;
Evit eur wech, lezomp ma zad d'ober e benn ;
Dal ket gant komzou treut êsad e ziarbenn
Keun 'm euz 'peuz bet gant-an eur c'hrog 'vid ar beure,
Rag gant ze 'vo loariet, me 'zo zur, 'pad an de.

Janed Koz.

Petra fell d'ac'h, Monik ; red ê eur wech bennag
Laret ar wirione d'ean krenn ha distag ;
Eur vez ac'h ê d'e oad ren bue seurt a ra,
Ober fae war e dud ha dismantr e vara !

Marwonik.

N euz forz, 'm euz ket a zrouk, rag Doue a zo mestr,
Hag a oar kabestrar ar muian digabestr.

Janed o vont d'an nor.

Me glev eun nep bennag o c'hrozmolat 'n eur dont.
Hen ê, ha koz e benn ! Gwerc'hez ! penoz 'vo kont ?

DIVIZ III.

An hevelep re. — Job.

Job euz a ziavez.

Me c'houlenn an tanfoeltr war ma chouk da gouean,
Mar tec'h deuz ma daouarn hep torri pe blegan !